

dispute entre la mort et un  
jeune homme.

4.10.6



# DISPUT

93

\* 27

Etre ar maro hac un Den Yaouanc.

CETU me erru, va mignon,  
Da ober dit renta reson  
Deus da vuhe tremenet,  
Scuis eo Doue deus da velet.

Autrou Doue, piou eo ema  
A zo deut quen disonch amâ,  
Va speret so troublet  
Gant epouvant deus e glevet.

Petra leveres, va mignon,  
Les da spont ha cont da reson;  
Ha ne vouies-te quet erfad  
E teujen abred pe divezâd.

Allas fioas ne ouien quet  
E dliac'h donet quen abred,  
Me songe din pa voan dispos  
Ne varvjen quen na vien coz.

Mæs alies te poa clevet  
N'ameus biscoaz den espernet,  
Hac e dlean an oll falhad  
Coz ha yaouanc deus a beb oad.

A

Bibliothèques  
Quimper  
Communauté

108746

Allas fioas, en joa ar bed  
 E voa va speret occupied,  
 Em yaouanquis voa va fians  
 Hac em mignonet va esperanç.

Penaus, den sot aheurtet,  
 Ne voas te quet avertisset  
 Da reformi da voal vue  
 Pa ne voas quet sur a un de.

Allas fioas, me vel on fasiet,  
 Mar plich ganec'h c'hoas depordet,  
 Roit din eur bloas termen  
 Ma rin quen mervel pinigen.

Penaos e fell dide ober  
 Pinigen e quen ber amser,  
 Pa n'ac'heus gret bete vreman,  
 Ha te pel so var ar bed-man.

Me bromet dec'h a dra certen  
 E rin prontamant piaigen  
 Ha repari va yaouancquis  
 Ma roït din termen eur miz.

Bet aoualc'h ac'heus amser  
 Mar carges ober da zever,  
 Mæs ne alles pelloc'h appell,  
 Erru an heur, red ê mervel.

Pa n'an d'ê quet ho polonte  
 Va lesel queit-se en bue,  
 Mar plich guenec'h da viana,  
 Un de c'hoas a c'houlennan.

Ha ça breman patientet,  
 Erru an heur, red ê monet,  
 Rac-je sonch prest ê col vue;

Ret è monet dirac **Doue.**

Penaos eta mervel zo red.

A greis ma ners ha ma yechet,

Penaos quitad ma desseinou,

Va joa, va c'herent ha va madou.

Divead oud brema da vouela

Ouma eo da heur divea;

E zan da rei dit an tol mortel,

En heur-mâ e renques mervel.

Breudeur, querent ha mignonet,

En hano Doue, va sicouret;

Scoet on ganta d'ar maro,

Deut d'am sicour, hastit afo.

Evit brema ne allomp quet,

Hean hon eus affer bresset,

Pa retornimp ni a velo,

N'hoc'heus quet a reson, varo.

Guel, den sot, den aheurtet,

Petra respont da vignonet,

Avou brema, den diavis,

Peguen tromplus eo yaouancquis.

Guir a laret, me zo tromplet

Gant yaouancquis ha mignonet,

Brema me ro dezo mallos

D'am oll malheur ez int bet caus.

Me ho supli, o va Jesus,

Ha c'hui Guerc'hes, mam truesus,

Me ho ped dre ho madelez

D'am sicour c'hoas pec'her ques.

Penaos ec'heus an assuranç

Da c'houlen diousimp assistanç;

Bepret oud bed hon adversour,  
Petra ve dempni da sicour.

O Sænt mignonet da Zoue,  
Ho peet true deus ma ene,  
Gant an oll on abandonnet,  
En hano Doue va sicouret.

Penaos ec'heus an hardison  
Da c'houlen hor protection,  
N'hoc'heus quet miret hor goueliou  
Nac imitet hor vertuziou.

O va æl mad, o va den quer,  
Va gardien e peb amser,  
M'ho ped va sicouret brema  
Em necessite diveza.

Quement a allan emeus gret  
Bete vreman en da andret,  
Poent eo din da abandoni  
Pa n'hoc'heus quet sentet ouzin.

Me vel erfad eo tremenet  
Va amser da vea sicouret;  
Bevet emeus e libertin,  
Doue a rend justic erfin.

Em maro em diles Doue  
P'am boa dileset em bue,  
Resistet emeus d'e oll graçou  
Hac em refus em gouennou.

Dileset on en abandon  
N'en deus mui evidon pardon;  
Adieu, querent ha mignonet,  
Adieu, bed fal ha milliguet.

Adieu, grandeur ha bonbançou

Henoriou væn ha triomphou.  
 Adieu d'an traou deus an douar,  
 Adieu d'an Ee ha d'e c'hloar.

Mallos d'ar vam, mallos d'an tad  
 A zo bet ouzin quen ingrat  
 M'odeus gred din col ma ene  
 D'am bea lesset em liberte.

E zan da veza interret  
 En Ifern gant an dut daounet,  
 Da lesqui ebars er flamou  
 Da james gant an diaoulou.

A possabl e ve, ô va Doue,  
 A ferrac'h ouzimp dor an Eê;  
 Obtenit dimp, ô va salver,  
 Eur plaç en ho cloar eteinel.

Amen.



## CHANSON NEVEZ

*Var sujet ar goal Teodou.*

**T**Ostaet oll, tud yaouanc, tostaet da gle-  
 vet  
 Ur hiniat leun a c'hlac'har hac a daëro beu-  
 zet,  
 Voar sujet daou zen yaouanc en em gare  
 parfet,

Ya, gant fidelite, evel ma voa dleet.

An daou den-mâ a voa daou den en em  
gare parfet,

Ya gant fidelite, evel ma oa dleet;

Achu eo an amitie a so bet entreze,

Ar goal teodou milliguët a so quiriec deze.

Rac-se eta, tud yaouanc; glefot teodou  
fal

O tonet da drouc-prezet, deut pront d'o  
chasseal;

N'en deus nétra sanfiploc'h evit n'en d'eo  
hoc'h enor,

Hac a so dac'h utiloc'h evit n'en deo mil  
densor.

Ya, m'en assur dac'h, hac en assur erfat,  
M'en dalvezo d'ar goal teod abret pe zive-  
zat,

Laret en deus ac'hanon traou ha n'en d'int  
quet guir,

Hac empêchet ac'hanon da gafet ma desir.

Mæs me fio e Doue a so ur Barner mat,  
A buniffo ar goal teod abret pe zivezat:  
Laret eo d'ar goal teod partout dre ar vro-  
mân,

Nep a scoio gant ar c'hleze a berisso gantàñ.

M'em boa choaset ur Vestres, ar vravan  
feumeulen,

Hep laret droug a hini, a varche e pep tachen,

Hac a songe gueneme e voa din-me fidel

Caus eo bet ar goal teodou da drubuil d'am  
Mestres.

Abars un neubeut goude ha me clevet ar  
brut

Petra en devoa laret ar goal teodou d'e zut,  
Ha me diguemen ma Mestres en un tu a  
goste ,  
Eleac'h ma voamp-ni custum da gonta hon  
doare.

Pa er guelis o tonet, me voa bras suprenet,  
O tont da gonsideri penaus e voa changet ;  
Troublet e voa ma speret ha ma intenta-  
mant ,  
Ha privei eus ar parlant neuse soudent va-  
tant.

Ha ni commanç da vowel dre ur guir ga-  
rante ,  
Hep gallout lavaret guer an eil ouz eguile ;  
Me ho les da gonsideri da peguement a  
c'hlac'hар

Eo caus dimp ar goal teodou dimp-ni var  
an douar.

Pa illin mont da barlant , ha me goulent  
outhi :

Leveret din , ma Mestres , pere eo hoc'h  
anvi ;

Ma ouffen e ven quiriec , ma Mestres d'ho  
clac'hар ,

Me garre bout interret e calon an douar.

Eleal , ma Servicher , c'hui n'en doc'h  
quet quiriec ,  
N'en deo an teodou milliguet en deus hon  
glac'haret ,

Nonobstant quetmense me ho caro bepret ;  
 Ma n'am be quet ac'hanoc'h , biquen na  
 vin dimeet.

Adieu eta , va Mestres , quen a vo ar  
 c'hentân ;

Me am bo sonch ar c'homfou a laret din  
 bremàn ;

Ha pa ven lequet da choas etouez an oll  
 merc'het ,

Me am bo sonch ac'hanoc'h , ma c'harante  
 parfet .

Ar Son - mâ so composet certen hac a so  
 guir ,

A so groet d'un den yaouanc n'ell quet  
 caout e desir ,

M'en devo sonch e Vestres , pa glevo e  
 c'hanan .

Desquit-hi , oll tud yaouanc , d'en em di-  
 versifian .

*F I N.*